

YF_0053_An daou zen yaouank

Tud yaouank a Vreizh Izel, didostit da gleved
C'hwi a glevo kanan eur son a nevez komposet

Da selaou kanan eur son nevez bet komposet
Savet da zaou zen yaouank pere en em garent

Savet da zaou zen yaouank n'aint laket ho karantez (n'aint = o-doa)
O sonjal an eil d'egile koulz d'an noz evel d'an deiz

Savet da zaou zen yaouank pere en em garent
Abaoe e oent en o bugaleaj evelse e oent manet

Pa vane unan warlec'h, egile gortoze
Berr e kavent ho amzer tremen asamblez ho puhez

Ha pa oent aet da zeg vloaz, e oent aet d'ar hatekiz
Asamblez gand ar re all evel ma oa ar giz

Pa oa graet o zried Pask e-touez ar vugale
Kroget mad e oent dija da roulad ho yaouankiz

Med an dud p'o-doa gwelet peseurt fidelite
N'aint lakaet an disparti an eil deuz egile

Kaset ar plac'h d'ar gouent, triwec'h leo dioutan
O sonjal dre an amzer e nije dilezet anezhan

Med an dud na ouie ket hag-en finessou
Hag ar paotr a ouie lenn a skrive lizeriou

Hag ar paotr a ouie lenn a skrive lizeriou
Hag eur wech pe ziou er miz e vije kavet kelou

Pa oa echu he amzer deuz kouent e oa deut er-mez
Na n'eus ket bet eun eurvad dond deuz leanez

Na n'eus ket bet eun eurvad d'ober profession
Rag ar garantez lakaet a garge he halon

Mond a rae d'he has d'ar ger deuz a bep asamble
Evel daou zen unanet en iliz gand Doue

Bevet o-doa gand plijadur beteg eur bloaz warn ugent
Ken e oa digouezet ar houlz da dennan ar bilhet

Ha digouezet gantan eun niverenn izel
En-doa da guitaad e vestrez hag e vro Breiz-Izel

Eiz deiz araog e partias, an termen a oa lakaet
O tond en-dro deuz gousperou e oent en em rankontret

War vord an hent e oent chomet d'ober gaozeadenn
Gand daerou o daoulagad e oe glebiet o dilhad

Gand daerou o daoulagad e oe glebiet o mouchouer
Evel pa vije bet soubet en eur stank pe eur ster